

Diocèse de
Quimper & Léon
Diocèse de Quimper & Léon

Document numérisé en 2015

P. BOURDELLÈS

PASION
AN
AOTROU KRIST
PEZ-C'HOARI



Priz : Eur skoed

fb
243.
7

44259

J. Hermin
3/4/42
Caumont

PASION
AN AOTROU KRIST

(PEZ-C'HOARI)

gant an Ao. BOURDELLÈS

C'HOARIERIEN

AN TEST, — JEZUZ, — AN OFISER.

KAIFAZ, (a vezo, goude, an eil laer).

JUDAZ.

PER, (a vezo, goude, S. Yann).

AN AEL MAT, (a vezo, goude, mevel Pilat).

SATAN, (a vezo, goude, Barrabaz).

AR VATEZ, (a vezo, goude, Stez Veronika hag ar
Werc'hez).

PILAT, (a vezo, goude, al laer dehou).



I
AN TEST

En ano an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered Santel.

Dre druez ouz Pasion
Hor Mestr Jezuz,
A greiz e galon
E tle pep hini gouela druz.
Pa oa dastumet
Kuzul ar Brinsed,
Eur merc'her, — Judaz,
Evit priz dister
A dregont diner,
E Vestr a werzas.

I. AN DENTASION

JUDAZ, — SATAN

*(Judaz azezet, o konta arc'hant. — Satan a zeu sioul-
lik da harpa ouz kein ar skañon.)*

SATAN

Kleo, Judaz, ha n'eo ket eur vez?
Ar Vadalen, gant hec'h ardou,
Ne ra met forani madou!
War dreid Jezuz deus skuilhet c'houez
Az pije bet, evitan — sklaer!
A arc'hant gwenn tregont diner!

JUDAZ (*o chom da brederia*)

Siouaz! C'houez vat evel hennez
En deus kalz a dalvoudegez!
Tregont diner? — Kredi rafen...
Da rei aluzen d'ar beorien
O dije bet gwelloc'h implij
'Get a-stlabez war leur an ti.
Gomprenan ket va Mestr o veuli...

SATAN

Pa vo lâret ar wirionez,
Kalz traou all c'hoaz ne gomprennez !
Tri bloa 'so 'man o prometi
Ho kasfe d'e rouantelez.
E rouantelez? N'eus ket er vro
Eun devez-arat en e ano!
E lavares rei aluzen?
N'eus paour ebet, touez ar beorien,
Hag a vefe ken paour ha c'houi!
Ar vicher abostol eo an dreuta hini;
N'hoc'h eus lojeriz na toenn,
Nag eur maen da harpa ho penn.

JUDAZ

O! deut oun a-benn, brao ha mat,
Da lakaat a-gostez eur yalc'had,
En eur skrapat du-man, du-hont.

SATAN

Eur yalc'had? — Eun tamm gwerz-butun,
Ha netra ken! — Man war da gont
Pourvezi boed, hed ar sizun,
Gant mil boan; ha tastourn da yalc'h!
Kavout a rez eo leun awalc'h?
N'out ket hanter-baeet, va faotr!
Ma lez Jezuz 'velse e vevelien dic'hopr,
Eo marc'hadmat d'ezan ober e baotr faro
Ha sacha war e lerc'h genoïou bras ar vro...

JUDAZ

Eur mestr mat eo Jezuz...

SATAN

'vel ma kari e ri!
Mar kavez druz ar prad, dalc'h neuze da beuri.
Koulskoude, stal Jezuz a zo o vont da fall,
Hag e welez da unan, nemet e vefes dall,
Prinsed ar veleien a zo skuiz bras gantan.

Gwelloc'h eo kalz beza gant ar gouarnamant
Eget gant eur reder hep nag aour nag arc'hant.
Gra marc'had gant ar Brinsed... N'eo ket lâroun netra,
Met diouz an tu-se c'hallfes kreski da beadra.

JUDAZ

Mont mevel gant Kaifaz ha gant ar veleien?
Tud na glaskont nemet kreski d'ar paour e samm?

SATAN

Koz sorc'hennou Jezuz a zo sac'het ez penn.
Jezuz n'eus 'met kaoziou; Kaifaz 'n eus arc'hant.
Breman 'vat, Kaifaz man ket o klask mevel,
Ha te 'zo truilhennek da vont en e gastell...
Selaou ar pezh lavaran d'it :
Diouz tu Jezuz n'eus ken netra 'bet da c'hounit.
Stal Jezuz, c'hoaz eur wech, a zo o vont da fall,
Ha, ma 'z out eun den fur, distro war an tu all.
Emaint o klask an tu evit paka Jezuz;
Met trouz a vo, nemet ma vefe graet e kuz,
Gant unan eus an Daouzek, a c'hellfe brao ha flour...

JUDAZ

Hag e lâro an holl vo Judaz eun treitour?

SATAN

O! ma ne rez ket te, unan all a reio;
Ha neuze, ma mignon, Kaifaz a baeo.

II. KUZUL AR BRINSED

KAIFAZ — AN OFISER

« *Kaifaz a zo eur pennad 'so ouz e vureo o lenn hag
o skriva. An ofiser o tegouezout.*

AN OFISER

Salud d'eoc'h, Aotrou Kaifaz;
Deut vezer eus ho perz d'am c'hlsk.

KAIFAZ

Ya, greomp eur c'huzul e kuz;
Gwelomp penaos kemer Jezuz.
Ma ne reomp ket, e kredan
E vezimp ni paket gantan.
Azezit!

AN OFISER

Gwir, a dra sklaer a livirit,
Rak gant an holl omp dilezet.
Tud, me lavar d'eoc'h, tud brudet,
A zo ouz e heul bepred.
Ma chom beo, prestik e c'hounezzo
Kement penn-den a zo er vro.

KAIFAZ

Poent eo stanka war gement-se
Ha lakaat eur skoilh d'an den-se.
Setu am eus merket aman
Ar pezh c'heller tamall d'ezan :

- I. Hervez an Doktored, e vefe arabat
Masoni devez ar Sabbad;
Ac'hanta, 'm eus gwelet va-unan
Jezuz, en deiz-se, 'c'h ober fank
Da leda war e zaoulagad
D'eun den dall, 'vit e wellaat.
- II. Hervez an Doktored, e vefe arabat
Dougen sammou deiz ar Sabbad;
Hag em eus gwelet en deiz-se
Eun den divarc'het e izili,
War urz Jezuz o vont d'e di,
Sammet war e choug e wele.
- III. Hervez an Doktored, e vefe arabat
Dorna ed devez ar Sabbad;
Ac'hanta, 'm eus gwelet koulskoude
N ebestel, war yun baeo beure,
Tisilha pennoù gwiniz leun,
War balv o dorn, da zebri greun.

AN OFISER

Deiz ar Sabbad?

KAIFAZ

Deiz ar Sabbad!

Hep konta e talc'h da wellaat

En deiz-se, pep seurt kleñvedou...

(O kemer eur paper all.)

Gwelomp breman e brezegou.

Ar gourc'hemennou koz a zo leun a furnez.

« Lagad evit lagad, eun dant evit eun dant »,

A zo fall, emezan; hag e lavar karet

Kerkoulz 'n enebourien evel ar vignoned.

Gourc'hemenn diskiant!

Lârout a ra paea truaj d'ar Romaned.

War Dempl Jeruzalem e sko an dismegañs

Pa lavar e c'heller, gant doujañs,

Pedi Doue kerkoulz n'eus forz e pelec'h-all.

Difennet en deus laza eur plac'h a vuhez fall,

Ha, war zigarez rei pardon,

E tiskar 'barz ar vro Feiz ha Relijion.

(O kounnari.)

Drouk-komz gwas ma c'hall 'ra ouzimp, beleien :

D'an diaoul, emezan, 'omp mibien;

Brao diavaez, diabarz brein,

Hag heñvel ouz beredou gwenn!

Ret 'vo e gastiza garo

Hag, evit dizamma ar vro,

Vo ret e lakaat... d'ar maro!...

AN OFISER

N'hellomp ket, va Aotrou beleg,

Kouezet omp e galloud ar Romaned lorc'hek.

Gallout a reomp prizonia,

Gallout a reomp skourjeza,

Met da grouga eun torfedour

Eo ret kaout aotre an Aotrou Gouarnour...

Ha, ma lavar Jezuz paea an truajou,

Ne vo ket aotreet e lakaat d'ar maro.

KAIFAZ

Ya, mestr int war bobl Israel,

Ar baganed hudur! Hag an douar santel

Zo moustret gant o zreid milliget!

Evit hor pec'hedou eo ez omp daoubleget

Dirak Pilat, an divroad.

Awalc'h e varvfe eun den evit ar bobl a-bez :

Ma tec'hi diouz Judea ar pec'hed hag ar vez,

Doue! degemer maro Jezuz!

(Sioulloc'h, hag o sederaat tamm ha tamm.)

Lâret en deus ar fals-profed euzus,

E oa roue ar Yuzevien.

Dre eno, e teuimp a-benn!...

Pa lavarimp

E fell da Jezuz beza roue ha mestr er vro,

Pilat raktal a selaouo.

Pa lavarimp ne fell d'imp

Mestr ebet 'met an Impalaer

— Malloz war e ano! —

Pilat a roio d'imp hor goulenn brao ha kaer...

A! A! A!

(C'hoarzin a ra.)

III. AR MARC'HAD

KAIFAZ. — AN OFISER. — JUDAZ

JUDAZ *(o tont aonik)*

Salud d'eoc'h, aotrounez bras,

Aotrou 'n ofiser ha Kaifaz.

Me 'zo 'n den paour anvet Judaz,

A greiz e galon 'n ho servij.

KAIFAZ

N'emañ ket ar c'hiz ganeomp implij

Servijou klaskerien-bara.

JUDAZ

M'aotrounez mat, me 'oar petra
A zo ouz ho lakaat nec'het.
Fellout 'ra d'in lakaat ho kalonou e peoc'h :
Pegement 'rofet d'in ha me a werzo d'eoc'h
Jezuz a Nazared?

KAIFAZ

Netra ebet, sur mat! — Aman 'z eus beleien,
Aman 'z eus polised, aman 'z eus mevelien.
N'eus ezomm ebet ahendall
Sikouriou a-berz an dud-all.

JUDAZ (*goapaüs*)

Ankouaet hoc'h eus, a-barz eun amzer berr,
An drouz 'zo bet disul e kêr!
Pa oa Jezuz o tont aman,
Ar bobl o redek davetan,
Hag o leda war an hent bras
Dilhad, bleuniou ha bodou glas.
Kaer hoc'h eus kaout beleien,
Ha polised ha mevelien,
'C'h eus ranket en ho ti chom kloz,
Adalek beure betek noz!
Ha soñj hoc'h eus pegen lorc'hus
E respontas neuze Jezuz?
Ar vugale 'youc'he oa deut ar Mêsiaz;
Eur beleg a glaskas ober d'ezo tevel,
Ha Jezuz respontas :
« Ma rank ar vugale tevel
E skrijo ar vein hag ar rec'hel! »
Ar bobl a zo a-du gantan,
Ha n'eo ket dre an nerz e vo trec'het warnan...
Ret 'vo mont d'ezan dre zindan.

(*En eur vouse'hoarzin.*)

Me 'zo bet abostol e-pad tri bloaz gantan.
Pegement 'rofet d'in, ha me 'werzo 'nezañ?

KAIFAZ

Evit krouga Jezuz pa vo savet eur peul,
E vo savet re all d'e ziskibien d'e heul.
Ar priz 'vo roet d'it en deus talvoudegez,
Rak ma werzez Jezuz, 'vi lezet e buhez.

KAIFAZ

Arc'hant am eus ezomm. — Arc'hant, ha netra ken!

(*Gant nerz.*)

Pegement 'rofet d'in, ha me werzo Mab den?

KAIFAZ (*Goude beza chomet mut eur pennadig*)
Pegement a fell d'it?

JUDAZ

Reit d'in tregont diner.

KAIFAZ

Dal! koulskoude eo ker...
N'ez ken da zilerc'ha ganimp,
Ha gra an afer prim-ha-prim!

IV. ANKEN JEZUZ

JEZUZ. — SANT PER. — AN AEL

AN TEST

An deiz kent ma varvfe
Tremenas Jezuz an noz-se
O pedi e dad.
Pa voe debret pred,
E liorz Olived
E c'houezas ar gwad.

(*Sant Per, war an a-raok, azezet.*)

(*Jezuz pelloc'h, daoulinet ouz troad
eur wezenn.*)

SANT PER

Pa gousk an holl, me ne gouskin.
Chom dihun gant va Mestr a rin.
'Man o lavarout e bedenn,
A-hont, e harp troad eur wezenn;
Deliou anezi alaouret,
Blenchou anezi arc'hantet;
Gwriziou anezi liou d'ar gwad.
An dour a ver a-hed he zroad;
An dour a ver a bep delien
War ar c'heot, takenn ha takenn.
— Siouaz!... ne deo ket dour a ver!
Nemet gwad Jezuz ar Salver!
C'houeza 'ra an dour hag ar gwad,
Hag hen kouezet en eur poullad.
C'houeza 'ra a vannac'hou bras!
Truez am eus outan, siouaz!

(Jezuz a sav hag a dosta outan.)

Aotrou Doue, Salver an dud,
Krog 'zo ganeoc'h eur gwall vurzud!

JEZUZ

O Per, na vezit ket souezet,
'Welout ar gwad am eus c'houezet.
Pedet 'm eus evidoc'h, na vefet diskaret,
Met e-lec'h m'oun o vont, n'hellit ket c'houi donet.

SANT PER

Ken striz eo an hent, Mestr karet,
Ken striz ken ne c'hellfen ket
Mont ganeoc'h-c'houi diwar-vreman?
Mervel, kredit start, ha beva
Ganeoc'h bepred eo a glaskan,
Rak me ne spontan rak ar boan!

JEZUZ

Kent ma kano kog ar beure,
Am diañsavfet gant ho le,

Hag e lavarfet : « M'hen toue!
N'anavezan ket an den-se! »
Gwasa glac'har sko em c'halon,
Gouzañv diansav dirazoun!

SANT PER

Ho tiansav, me? Ne rin ket!
Gwell 've ganin beza krouget!

JEZUZ

Evit krouget ne vezit, Per;
Nemet me, Jezuz, ho Salver;
Ha c'houi 'vo gaouiat em c'henver,
Eur wech, diou wech, ha betek teir!

*(Sant Per a selaou Jezuz da genta,
hag a van kousket goude epad
ma talc'h Jezuz da gomz.)*

Selaouit holl, poblou ar bed,
Selaouit va leñv estlammet!
'M eus ho krouet, me ho preno,
N'eus forz petra a c'hoarvezo.
Mir na yafec'h, bihan na bras,
D'an ifern yen gant Satanaz!
Mir n'ho lonko genou 'n ifern,
E deiz ho parn, kig hag eskern,
Genou 'n ifern, bepred digor,
Frank ha ledan evel ar mor.

(D'an Abostol.)

C'houi 'zo kousket, hag o tevel!
kousket ar bed hag an avel.

(Eur skrijadenn a sav : eskenn-sonerez.)

Pe skrijadenn hir a glevan?
Eman an douar oc'h euza.
Eus ar mor gwenn, an douneier,
E sav garm dreist d'ar c'hoadeier.
Ar menezioù en em zispenn;
An oabl a ouel gant an anken;
Mañ 'r stered en Neñv o koenvi;
Mañ 'l loar er mor doun o virvi.

*(Mont a ra da zaoulina adarre. An
Ael a bar, eur c'halur gantan.)*

Pec'herien, c'houi a welo sklaer
Gwinta warc'hoaz kroaz ho Salver,
Hag hi ruziet a benn da benn
Gant gwad santel kalon Mab-den.
C'houi a welo c'hoaz an tachou
O deus gwriet ho kwir Aotrou.
C'houi 'welo ar gurunenn-spern
O steredenni war e benn,
Hag ho klevor o lavaret :
« Hon sikourit, Salver ar bed!
Truez ouzimp! ne ouiemp ket
E oa c'houi 'oa aze krouget! »
— Truez? siouaz, n'ho pezo tamm,
Evidoun da gemer ho samm;
Daoust na vin 'met gouli ha gwad
'Dalek va fenn betek va zroad!
Aotrou Doue, roue 'r bed holl,
Ne ray 'n eneoù nemet koll?
Pa 'z afen mil gwech d'ar maro,
Mil gwech e pec'hfent c'hoaz en-dro.

*(An Ael a ginnig ar c'halur. Jezuz
a dosta e ziwuez — hag a dro
e benn en eur euza.)*

Pellait ouzin, va Aotrou,
Ar c'halur leun a viltansou!
Pa dosta va genou outan,
Va c'halon baour a venn ranna!

AN AEL

Siouaz! siouaz! klouar Jezuz,
Houman 'zo 'n anken druezus.
Kemerit kalon hag evit
Da yac'haat 'r re hoc'h eus krouet.

JEZUZ (a ev)

Pa yac'hafen nemet unan,
Me a evo ar c'halur-man.

Da! kalur a silvidigez!
Da rin, va Zad, ho polontez!

*(An Ael a ya kuit. — Jezuz a zeu
davet an abostol kousket.)*

Savit, va breudeur, deomp breman.
An treitour 'zo 'tont 'trezek aman.

*(Judaz o tont sioul gant Kaifaz hag
an ofiser.)*

JUDAZ

An den a bokin-me d'ezan,
Hennez a vo... Krogit ennan,
Stagit-hen ha sachit ganeoc'h,
Gant aon 'tflipfe diganeoc'h.

(Da Jezuz en eur bokat d'ezan.)

Mestr doujet, Doue d'ho salvo!
Dreist pephini r'ho enoro!

JEZUZ

Judaz, perak 'werzez Mab-den,
O va mignon, gant eur pok yen?

KAIFAZ

An hini 'n deus poket Judaz,
Krogit ennan! Hennez eo 'r gwaz!

AN OFISER

Krena 'reomp,
Hag horjellat gant ar spont!

JEZUZ

Piou a glaskit, va mignoned?

KAIFAZ

Jezuz, ar paotr a Nazared.

JEZUZ

Me eo Jezuz...

(Koueza reont.)

SANT PER

Setu kouezet

Ar c'hoz soudarded milliget!

Aotrou, ma ve c'houi hol lezfe,

Gant ar c'hleze ni a skofe?

Ni a skofe kreñv hep damañt,

Ma teurvezit rei hoc'h asant?

*(Jezuz a zalc'h Per a-dreñv hag a
zeu war raok.)*

JEZUZ

Mar deo me eo a fell d'eoc'h-c'houi,

Krogit ennoun hep dilerc'h mui.

Lezit ar re-man da vonet.

KAIFAZ

Krogit ennan 'ta, ailhoned!

AN OFISER

N'ho pet ket aon, start e krogomp.

KAIFAZ

Ha kerdin 'zo?

AN OFISER

Pez 'zo ezomm,

(Da Sant Per.)

Skarzit diwar-dro, marmouzien,

Pe ho pezo war ho kroc'hen.

SANT PER

C'houi ho pezo war ho klopenn!

Dalit... tenn!... ha c'houi 'c'houlenn ken?

AN OFISER

Ay! va malloz d'ar ganfarded!

Setu me 'zo diskouarnet!

JEZUZ

Per, neb gant kleze 'n devo tizet

A vo gant kleze kastizet.

— Ha ma karfen pedi va Zad,

E tegasfe daouzek rummad

Aelez galloudus, d'am difenn...

Ar skritur 'zo da gas da benn...

Tosta, soudard, ha na spont ket :

Setu yac'h da skouarn trouc'het.

KAIFAZ

War-raok!

EIL LODENN : **DLE AR PEC'HEB**

—:—

AN TEST

Jezuz 'voe kaset

Da di Gaïfaz;

Dismegañset, argaset,

Kalz a c'houzañvas,

'Balamour hepken

Ma kare an den!

LEZ-VARN KAIFAZ

KAIFAZ. — AN OFISER. — JEZUZ

AN OFISER

Setu ganeomp, aotrou Kaifaz

Dirak ho parn, ar gaouiad bras.

KAIFAZ

A! A! gant va zud, en taol-man,
Eo taget ar c'hoz sorser-man!

(O azeza ouz an daol-varn.)

Lavar d'in aman, krak ha krenn,
Pe vicher 'ra da ziskibien?
Lavar ivez, hep kaout mez,
Ha peseurt kelennadurez?...
E kuz, 'prezegez falz lezenn?

JEZUZ

Dindan guz, da zen, tra ebet
Biskoaz n'em eus-me sarmonet.
En iliz ha war blasenn kêr,
Em eus bepret prezeget sklaer.

AN OFISER

Lavar, den falz, war an ton-se
Respontez d'an otorite?

(Eur palvad a ro da Jezuz.)

JEZUZ

Mar komzan fall, diskouez perak; —
N'ez ket da skei, mar komzan mat.

KAIFAZ

En desped d'az teod ha d'az fri,
E c'houzañvi ar maro kriz,
Kent ma tremeno ar gwener...

(Sevel a ra.)

A-berz Doue, ar gwir Grouer,
Lavar d'in sklaer, tad ar gevier,
Ha te a vefe Mab Doue?

JEZUZ

E gwirionez, me a lavar,
Pa vezo deut fin an douar,

Pa vo ar bed war e ziskar,
E vo gwelet neuze Mab-den
O tiskenn diwar lein an Neñv,
Azezet en tu-dehou
D'e Dad, an Doue beo.

KAIFAZ

Pebez ezomm hon defe-ni,
Diwar-vreman, a desteni?
E-unan e ro e hini!
Eul le-doue spontus a ra!
E dad... a zo eus ar vro-man.
Arsa, livirit hoc'h ali...

AN OFISER

Din eo da vervel, netra ken!

KAIFAZ

Barnet eo eta, hervez al lezenn,
Evel touer, evel gaouiad,
Evit beza lavaret e oa Doue e Dad...
Barnet eo da vervel. — Deomp davet Pilat
Da c'houlen digantan
Kas da benn ar setañs.

*(Dont a reont da greiz al leur, Jezuz
etrezo. Eur vatez a zo eno, eur
pennad 'zo, o labourat e kichen
eun tantad tan. Sant Per a zo
deut davet an tan, met ne gred
ket tostaat re, gant aon beza
anavezet.)*

AN TEST

Sant Per, er-maez
A nac'has e Vestr.
Met ar pec'her kaez
Pa glevas goude

Ar c'hilhog a gane,
'Guitaas an ti
Gant gouelvan ha kri.

AR VATEZ. — KAIFAZ. — JEZUZ — AN OFISER. — PER.
(*O tiskouez Per*)

AN OFISER

Me 'gred start, diouz gwelout e stad
Heman 'zo e doan hag huanad,
Marv gant ar riou, o c'hoantaat tan.
— Eus tu ar Profed ne d'eo ket?

(*O sellout ouz Per a-dost.*)

Eo, hep mar; — n'eus douetans ebet!

AR VATEZ

Petra eo a rez-te aman?
Kae d'ar gêr, ha kuz... Ahendall,
E c'hellfe warnout koueza gwall.

PER

N'oun ket d'e heul, — m'hel lavar krenn,
Ha ne garjen ket e vijen!

(*Ar c'hilhog a gan goustadik.*)

AN OFISER

Gaou divez a lavarez-te;
Da stumm da gomz hen diskouez re :
Eus Bro-Galilea ez out.

PER

N'oun ket 'pez a levez-te!
Piou 'ha penaos eo an den-se?
Fae a vefe ganin gouzout.

(*Ar c'hilhog a gant krenvoc'h.*)

AN OFISER

(*Da Gaïfaz.*)

Arabat chom nec'het war se;
Dirak pep den e talc'han-me,
An den-man a zo aman deuet
Oa gant Jezuz a Nazared.

(*Da Bêr.*)

El liorz, p 'oa taget da genta,
'M eus gwelet ac'hanout gantan!

PER

Dre 'n Doue beo, n'ouzon piou eo!
Me 'lavar d'eoc'h hen nac'han krenn!
(*Ar c'hilhog a gan krenn.*)

JEZUZ

Per, va mignon, me az kare;
Perak, hep mez, am nac'hez-te?
(*Sant Per a laka e benn en e
zaouarn.*)

KAIFAZ

Krañchit war e fri hag e benn
D'ar sorser-man ha, staget mat,
E vo kaset dirak Pilat!
(*Kaïfaz, an ofiser ha Jezuz a ya
etrezek ti Bilat.*)

PER

Siouaz Doue! petra breman
Am eus-me, den vil, graet aman!
Diañsav dirak an douar
Gwir Vab Doue, va Mestr klouar!
Va Mestr Jezuz, ken dous, ken koant!
Goude va ober Pab ha Penn,
E nac'h displeal evelhen!
Me 'ya d'eun toull kuzet ha du
'Lec'h ne vin gwelet a nep tu.
Da viken e chomin eno,
Betek an deiz ma pardono.

LEZ-VARN PILAT

PILAT. — E VEVEL. — KAIFAZ. — JEZUZ. — BARRABAZ

KAIFAZ (*dirak ti Bilat*)

Yuzevien vat ha santel,
N'hellomp ket mont er c'hastel;
Saotret 'vijemp o vont 'dan doenn eur pagan.
Arc'hoaz eman gouel Fask. N'helljemp ket dibri
[n oan.
Galvomp ar gouarnour, ma teuo davedomp.

HOLL

Aotrou Pilat!
Aotrou Gouarnour!

PILAT (*o tont ermaez*)
Perak ez eus kement a drouz?

AN OFISER

Aotrou Pilat, den a renk bras,
Heman d'eoc'h c'houi, gant Kaifaz,
'Zo degaset da gastiza.

PILAT

Arsa, petra eo an dra-man?
Ha pebez klemm a zo warnan?
Enep d'ezan, ar gasoni
Zo krog ennoc'h 'vel eur broud-tan,
Ma vije lâret reveulzi!

KAIFAZ

Pilat, na vezit ket souezet.
Drouk-oberour ma ne vefe,
Ne vije bet d'eoc'h degaset.

PILAT

Kasit-hen ganeoc'h 'ta neuze,
Ha c'houi verko e binijenn
'Vel ma c'hourc'hemenn ho lezenn.

KAIFAZ

Barnet eo bet, ha barnet reiz,
'Vel den diwirion ha difeiz.
Met setans a varo n'hellomp ket ni dougen;
A-berz an impalaer e teu d'imp an difenn.

PILAT

Eur setañs a varo?
Perak 'skoit warnan eur setañs ken garo?

KAIFAZ

Kavet eo bet 'redek ar vro,
Eus Galile betek aman,
O harz ouz ar bobl d'ho touja.
Krist, ha Mab-Doue, ha roue
A lavar beza, hag e vo
Ma ne reomp ket war e dro!

PILAT (*da Jezuz.*)

Te 'zo roue ar Yuzevien?

JEZUZ

Unan bennak en deus komzet d'eoc'h war va fenn?
Pe ac'hanoc'h hoc'h-unan e komzit evelhen?

PILAT

Me n'on ket eur Yuzeo. Prinsed ar veleien
Eo 'lavar kement-man.

JEZUZ

Va rouantelez-me n'eo ket eus ar bed-man.
Ahendall, e stourmje va holl servijerien
D'am diwall diouz ar Yuzevien.
Met va rouantelez n'eo ket eus ar bed-man.

PILAT

N'eo ket eus ar bed-man? War biou out Roue 'ta?

JEZUZ

Neb a glask gwirionez, hennez 'selaou va mouez.
Ganet oun er bed-man 'vel test d'ar wirionez.

PILAT

(En eur heja e ziskoaz.)

Petra eo ar wirionez?

(D'ar Yuzevien.)

Kêriz, selaout. Ne gavan
Netra da damall d'an den-man.

KAIFAZ

Ma rit gras, ni hen goar,
Ne vit ket mignon da Gaesar.
Ra vo Jezuz e kroaz staget
Pe da Gaesar vo lavaret!

PILAT (da Jezuz)

'Welez ket da re, pe desteni
Ha pe respont divergont 'reont-i?
Ha pebez youc'hadeg warnout!
Deus, lavar d'in : A belec'h out?

(Jezuz ne respont ket.)

Lavar d'in 'ta a belec'h out?
Gwelout a ran ne respontez netra.
Ha n'ouzout ket e c'hellan 'ta
Da lezel da vont diboan ha digastiz,
Pe kas 'c'hanout d'ar maro kriz?

JEZUZ

N'ho pefe galloud warnoun, Pilat,
Ma ne vefe digant va Zad !
Me 'oar e rit-hu pec'hed bras,
Met ar re am ro d'eoc'h, dre fallentez ha kas,
Pec'hed ar re-se a zo gwasoc'h c'hoaz.

MEVEL PILAT (O tegouezout gant eul lizer.)

Digant an itron 'm eus lizer,
Da rei d'eoc'h, aotrou gouarner.

PILAT (o lenn.)

« Al lizer-man 'zo d'am fried
D'e bedi ne asanto ket

Da varv Jezuz, daoust da bep tra.
Rak n'e garin mui birviken
Diwar vremen, mar hen gra.
Bet 'm eus hunvre ha faltazi,
A ro d'in preder ha soursi,
D'arbenn Jezuz... M'hen barnez, Pilat,
E kouezimp neuze e gwall stad. »

*(Goude beza prederiet eur pennad,
— D'ar Yuzevien.)*

Gortozit, kêriz, me ho ped;
Gwelloc'h eo, 'vel tud a spered,
Poueza ervat 'pez a reomp.
Ma 'z afemp re vuan, e vefe klemm warnomp.
Peogwir emañ ar c'hiz 'n ho pro,
Pa zeu goueliou ar Pask endro,
Da rei frañkiz d'eur prizoniad —
Mevl, kerc'h aman Barrabaz;
Kêriz a raio an dibab,
Hag e vo lezet dishual
An hini a blijo d'an dud.
M'ho ped, kêriz, da boueza mat,
Gant sklaerijenn ha skiant fur,
'Raok ober ho tibab hervez ho plijadur.
Setu dirazoc'h Barrabaz,
Laer, muntre, torfedour bras,
Ha setu ivez Jezuz
En deus sarmonet gant douster
Evit ho tougen d'ar vertuz.
Heman eo dleet, pa n'eo ket eun den fall,
Lezel da vonet didamall...

KAIFAZ

Heman? Biken! Ne vezo ket!
Barrabaz hon eus dibabet!

PILAT

Petra 'rin neuze da Jezuz?

KAIFAZ

Hen 'staga ouz ar groaz !

PILAT

Hag an den fall a chomo digastiz ?
Ne rin ket eun torfed ken kriz.
Jezuz gant daou vevel a vezo skourjezet,
Met goude vo lezet da vonet...
Dishualit daouarn Barrabas
Ha stagit Jezuz ouz ar pilier bras.

AN OFISER

Me 'denno d'ezan e zilhad
Evit ma vo skourjezet mat.

(Kregi 'ra e Jezuz.)

BARRABAS *(dizereet gant ar mevel)*

Feiz! va zud keiz, me a grede,
Kordenn em gouzoug, beza krouget
Ha, sur mat, em boa graet 'vit se
Kalz muioc'h eget na zo ret,
Me, Barrabas, spontailh ar vro!
Met breman e rin c'hoaz, war-dro,
Muioc'h a reuz 'get n'em eus graet!

*(Pilat ha Kaifaz a sell ouz ar me-
vel hag an ofiser o skourjeza
Jezuz.)*

AN OFISER

Te a sko laosk ha goustadik!
Ret eo garo e gastiza!

AR MEVEL

E holl wad a ya digantan;
Souden e vo diwadet mik.

AN OFISER

Rabat lezel takenn ennan!

AR MEVEL

Skuiz oun gantan.

AN OFISER

Mat eo breman! Ha treid ha penn
Dispennet eo, kig ha kroc'henn...
Breman, ra vo anvet roue.

AR MEVEL

Ma vefe gwisket gant eur sae?

AN OFISER

Gant eur sae ruz... Houman 'zo mat.

AR MEVEL

Likit ar sae-man, va den mat,
Likit-hi, pad m'eo tomm ho kwad.

AN OFISER

Ma vefe breman kurunet,
Araok ma vezo enoret?

AR MEVEL

Lakaomp d'ezan war e benn
Garlantez graet gant eun drezenn.

AN OFISER

Setu eur gurunenn e spern,
A doullo d'ezan e eskern.

(O pennglina.)

Ave, Rex Judeorum!

AR MEVEL

(O pennglina ivez.)

Roue ar Yuzevien, enor dreist pep hini!
Da virviken, salud d'eoc'h c'houi!

PILAT *(O tiskouez Jezuz d'ar Yuzevien)*

Setu ho ten... Sellit outan!
Gouzañvet 'deus anken ha poan
Muioc'h eget den er bed-man.
N'eo ket awalc'h c'hoaz evelhen?
Sellit ho roue, Yuzevien!

KAIFAZ

Ra vezo staget ouz ar Groaz!

PILAT

(Goapaer ha kasais.)

Ma stagfen ho roue e kroaz,
E rafen d'eoc'h dismegañs bras!

KAIFAZ

N'hon eus roue nemet Kaesar!
A greiz kalon, ni hel lavar,
Hag ez aimp-ni davetan,
Ma nac'hit c'houi kondaon heman...

PILAT

N'em eus ket c'hoant ouz ar groaz e staga,
Rak tamall ebet n'em eus kavet ennan.
Eur marv ken kriz ha ken mezus
Evit eun den dizrouk a zo eun dra euzus.

KAIFAZ

Pilat,
Pe vo mat d'it, pe ne vo ket
Heman ranko beza krouget!
Krouget!

PILAT

(O skriva ar setañs.)

Me a vo didamall evit gwad en den-man,
Eun den reiz 'n e gomzou hag en e oberou.
Ma teu droug, c'houi hen dougo.

(Gwalc'hi a ra e zaouarn.)

Ha ma ran gaou o varn 'nezan,
E walc'han me va daou dorn glan :
Warnoc'h 'vo bec'h an holl bec'hed!

KAIFAZ

E wad ra vero 'vel dour yen
Warnomp holl ha war hol lignez,
Hag hor bugale da viken!

PILAT (o lenn)

Me, Pons-Pilat, galloudus-meur,
War dud ha traou anvet barner,
A-berz Kaesar, e Betleem,
Kerkoulz hag e Jeruzalem, —
Klevet ar youc'h hag an tamall,
An testeni hag ar vrud fall
A zo diwarbenn da vuhez,
Ar c'hlemmou deut a bep kostez,
Az parnan, hep damant d'ar gloaz,
Da veza staget ouz ar Groaz,
Da veza gwriet, treid ha daouarn,
Ouz ar c'hoad, gant tachou houarn;
Da chom eno betek mervel,
Diwallet gant pevar mevel.
Setu va setañs ha va barn.

HOLL

Meuleudi da Bilat,
A zo barner fur ha leal!
Meuleudi da Bilat,
A zo barner mat!

HENT AR GROAZ

SANT YANN. — SANTEZ VERONIKA. — JEZUZ

(O tougen e groaz, ar Yuzevien d'e heul.)

AN TEST

*(E-pad ma komz, an ofiser hag ar
mevel a samm ar Groaz war gein
Jezuz, hag an holl a ya d'e heul
e-maez, dre eun tu. Nebut
goude, e tistroont war al levr-
c'hoari, eus drek ti Pilat.)*

Jezuz, Mab Doue 'n Tad,
Kaer ha mat dreist natur,
Deut, dre ar boan vras,
Vil dreist pep krouadur,

'Sammaz e Groaz

War e ziskoaz.

Da wener ar Groaz, da greisteiz,
Gwelout Jezuz 'oa eun druez,
E Groaz pounner sammet gantan,
O vont da Venez Golgota.

Pa oa war an hent,
Ar Groaz war e gein,
War-raok e gasent,
O skrignat o dent,
'Trezek ar Menez,
Da goll e vuhez.

SANT YANN

Kriz 'vije ar galon na ouelje,
E-biou an hent neb a yaje
Gwelout Jezuz a zo torret,
Gwelout va c'henderv binniget!
Mont 'ra d'an traon, mont ra d'an nec'h.
Hen heulia 'rin n'eus forz pelec'h!
Menez Kalvar nag heñ uhel!
Na sounn an hent, hag hir ha pell!
E pep korn an hent e simpla.

(Jezuz a gouez.)

Kement poull 'zo, e kouez ennan.
Jezuz! houman 'zo eun drôad!
Etouez ar fank, etouez ar gwad!
Ho roudou-c'houi a zo anat!
Ho roudou 'zo ganto c'houez vat.
Tra ma kerzan, kavan 'nezo.
Tra m'o c'havan, pokan d'ezo

*(Stoui a ra elec'h m'eo bet kouezet
Jezuz.)*

'Pokan d'ezo, 'n eur ouela druz.
Ne c'hellan ken, paour-kaez Jezuz!
Gouela 'rin betek ar finvez.
Merc'hed ar vro a ra ivez.

JEZUZ

Tavit, merc'hed! Na ouelit tamm
Ouz va gwelout dindan va samm.

Nemet warnoc'h-c'houi hoc'h-unan
Eo ret gouela tenn, a-vreman.
A-barz nemeur e vo klevet :
« Eürus neb n'eo ket dougerez,
Hag ar wreg n'eo ket magerez! »

VERONIKA

Ar mouchouer diwar va fenn
E torchin gantan e gerc'henn.
Dic'houezit ho tal, Jezuz ker,
Gant ar penn eus va mouchouer

JEZUZ

(a zic'houez e dal hag a ro ar mouchouer endro).

Mirit breman ho mouchouer
Ha kasit-hen ganeoc'h d'ar gêr.
Na d'it ket gantan d'an dour-stêr,
Rak eman 'barz gwad ar Salver.
Na d'it ket gantan d'an dour-prad,
Rak eman 'barz gwad glan ho Tad.
N'it ket d'ar waz-dour na d'ar stank;
Bout 'z eus ebarz seiz sakramant,
An nouenn hag ar vadeziant,
Ar vadeziant hag an nouenn
Hag a zo ret da bep kristen.
N'hen kannit ket gant an dour-red;
Ar Gwad a gann pec'hed ar bed.

(Hag e talc'hont gant o hent.)

KROUGADENN JUDAZ

KAIFAZ. — JUDAZ. — AN AEL MAT. — AN DIAOUL

AN TEST

Pa welas e Vestr gant e Groaz,
Tec'hout kuit a reas Judaz,
Hag an arc'hant a restaolas.
Evit gopr e zroug,
Kordenn 'n e c'houzoug,
Neuze 'n em grougas.

JUDAZ

*(O tont eus drek eun ti a youc'h : Siouaz !... Ha
Kaïfaz a zistro).*

Breman welan pegen kalet
E skoer va Mestr binniget!
Me 'zo en dra-se da damall,
Ha me, den drouk, ha me, den fall!
A diaoul euzus ha milliget,
Gant an arc'hant 'out bet tennet!

Siouaz!...

Te ra va glac'har, arc'hant brein,
Te 'denn ar malloz war va c'hein!
Pec'het em eus!... O! spontus eo!
Gwerzet em eus gwad eun den beo,
Gwad eun den santel, eun Doue!
Adkemer da arc'hant, Yuzeo!

*(Skei a ra ar sac'had arc'hant war
an douar.)*

KAIFAZ

Petra 'ra d'imp war gement-se
Na da geuz na da anken-te?
Arc'hant e oas deut da c'houlenn.
E oamp 'n em glevet war dregont,
Hag ez poa kavet reiz ar gont!

*(Dastum a ra an arc'hant, ha mont
warlerc'h ar re-all.)*

JUDAZ *(O tec'hout kuit, daoubleget gant ar glac'har)*

Siouaz! Siouaz! Siouaz! Siouaz!
Siouaz! tud keiz! me eo Judaz!
Gwasa muntrer 'zo bet ganet
Etouez an dud a zo er bed!

AN AEL MAT

Lavar d'in, Judaz, me az ped,
Pelec'h 'ez te? Pelec'h out bet?

JUDAZ *(dic'hek)*

Va Aotrou 'oun bet o werza,
Ha mont a ran d'en em grouga.

AN AEL MAT

Selaou, Judaz, ouz da Ael mat.
A-berz Jezuz ez oun kannad.
Judaz, Judaz, te 'z a da goll!
Goul pardon digant Mestr an Holl!

JUDAZ

Penaos 'vefen-me pardonet?
Re vras an torfed am eus graet!

AN AEL

Ken prim eo Doue da bardoni,
Evel an den d'e anwazi.

JUDAZ

Penaos 'vefen-me pardonet?
Kas e Vab d'ar groug am eus graet!...

AN AEL

M'ac'h eus keuz, truez a gavi.
Distro outan, hag e weli.
N'eo ket aet c'hoaz e wad da hesk;
War e zioujod e tiver fresk.

JUDAZ

Ma tiver, evidoun n'eo ket.
Tregont diner 'm eus hen gwerzet...
— Eur skavenn du-hont a welan,
Ha d'en em grouga outi 'z an.
Gant va daouarn en em stagin,
Ouz uhela skourr a gavin.

*(Epad ar malloziou, an Ael mat a
ya kuit, hag an diaoul a zeu e-
maez an ifern.)*



— Malloz d'ar bed! malloz d'al loar!
 Malloz d'an heol ha d'an douar!
 Malloz d'an tad 'n deus va maget,
 Malloz d'ar vamm 'deus va ganet,
 Malloz d'ar Yuzevien daonet!
 Malloz da gement 'zo krouet,
 Nemet Jezuz 'vallozin ket!
 — Deut, diaoulou an Ifern,

(An diaoul a zered.)

Satan ha Lusifer,
 Ma rin va zestamant!

SATAN

Gra buan, paotr!

JUDAZ

D'it-te, Satan,
 En em roan korf hag ene,
 Hag e c'houlennan 'vit leve
 Ma vin an douna 'kreiz an tan.
 Dilez a ran, hag e nac'han
 Ar Baradoz hag an Dreinded,
 An Tad, ar Mab, ar Spered-Glan,
 Ar Werc'hez Vari vinniget!...
 Ne glaskan ken, diwar vreman,
 Nemet an ifern hag an tan,
 Da veza er gaoter bervet,
 Kignet, rostet, 'vit va zorfed!...
 Hag e roan va bouzellou
 Da vil tounseg, 'vit o frejou!
 Va diskouarn am eus barnet
 Da glevout pep kri milliget.
 Va daoulagad dispourbellet,
 Da ouela gant ar re zaonet.
 Va fri, da c'houesa c'houez flaerius,
 Ha va zeod da youc'hal euzus,
 Ma ouezo an holl er puñs teñval
 E vo Judaz 'vo o yudal.
 Kof, kein, izili ha kalon,

A roan holl d'it, ez-wirion!
 En desped da Zoue am c'hrouas,
 Ez in d'an tan, 'tal Satanaz!

SATAN

Mat a rez, a-greiz da galon
 Nac'h digant Doue ar pardon.

JUDAZ

Birviken ne c'houlennin gras!...
 Poent eo d'in lakaat ar c'hroug-las?

SATAN

Ya! ya! sur mat, deut eo ar poent!
 Lak ar c'hroug-las-man ez kerc'hen.

*(Krouga a ra Judaz hag e sach
 gantan d'an ifern, a-bouez ar
 gordenn.)*

AR GROAZ WAR AR MENEZ

JEZUZ. — DAOU LAER E KROAZ. — MARI.

SANT YANN. — AR BOURREO

AN TEST

Pa oa Jezuz stag ouz e Groaz,
 'Tegouezas e vamm en he gloaz,
 'Tegouezas e vamm vinniget,
 Gant he niz sant Yann glac'haret.

MARI

Glac'har a zo em diabarz,
 Em c'halon baour yen evel sklas.
 Evit va Mab eo am eus nec'h,
 N'em eus e welet 'baoe dec'h.

*(Da sant Yann o tont diouz trezek
 menez Kalvar.)*

Sant Yann, va niz, d'in leveret,
 Perak 'ta n'em saludit ket?

SANT YANN

Va moereb santel, me ho ped,
Trugarez ouzin ho pezet,
Ne oan ket evit gwelout mat
Gant an daerou em daoulagad.
Va spered a zo dianket,
Ha va c'halon daouhanteret,
Me 'zo o tont diouz ar menez
Hag e welis eur groaz nevez,
Eur groaz nevez, hag hi uhel,
Siouaz d'am c'halon, o sevel!
Outi 'z eus krouget eur Profed
N'en deus graet nemet vad d'ar bed.
Outi 'z eus gwriet eun Doue!
Siouaz, moereb, n'hellan nac'h mui.
Ho Mabig 'zo gwriet outi!

MARI

Sant Yann, sant Yann, kenderv Jezuz,
Bezit ouzin madelezes!
Me ya va-unan da welet.
Pelec'h eman 'n hent da vonet?

SANT YANN

Deuit ganin dre 'l lannegou,
C'houi 'glevo trouz ar morzoliou.
C'houi 'glevo trouz ar morzoliou
O skei war bennou an tachou

(O c'hlevout a reer.)

An tachou dir, ar re houarn,
E treid Jezuz ha 'n e zaouarn.

AN TEST

Ne oa ken Mari 'vit tostaat
Gant an daerou 'n he daoulagad.

*(Ar ouel a zigor, da ziskouez an
teir Groaz.)*

MARI

Me 'wel ter groaz savet en aer,
Tri den staget outo o zeir.
Sant Yann, sant Yann, kenderv Doue,
Pehini an tri va Mab-me?

SANT YANN

An hini a zo er penn kenta,
Hag hen war ar groaz uhela,
Eur Yuzeo a bep tu d'ezan
An hini 'daol tri banne gwad;
Unan d'ar mor, unan d'ar c'hoad,
Hag unan all d'an douar plat.

AN TEST

Pa oa Mari ouz troad ar Groaz
Teir fazenn er skeul e pignas,
Ar vourrevien outi skoas.

MARI

Bourreo, bez mat; bourreo, bez mat,
Ma roin c'hoaz eur pok d'am Mab.

*(Pignat a ra betek Jezuz da boket
d'ezan.)*

JEZUZ

Sant Yann, sant Yann, va c'henderv ker,
Kasit va Mamm betek ar gêr.
Kasit-hi ganeoc'h-c'houi d'ho ti,
Hi vo Mamm d'eoc'h, c'houi mab d'ezi.
Kasit-hi d'ar gêr da ouela,
Me 'chomo aman da sec'ha.

SANT YANN

Deomp hon-daou, Mamm baour, a-gostez.
Pa c'hourchemenn Jezuz a-brez.

JEZUZ

Va Zad, an dud ne ouzont ket
'Maint oc'h ober ken bras torfed!

Degemerit evito oferenn va foaniou
Oferenn va gwad ha va c'horf,
Oferenn va maro!

(Gant douster :)

Va zad, etre ho taouarn va ene a fizian.

(Gant nerz, goude eun arsao :)

Al labour am boa d'ober a zo echu breman.

*(Teñvalijenn, luc'hed, kurun. —
Sklaerijenn ruz drek ar Groaz.)*

AN TEST

P'en deus skuilhet Jezuz e wad,
Betek an diweza berad,
Skuilhomp daerou a galon vat.
— Breman, 'n enor d'ar Gouliou
ni 'lavar ar paterou.
Ar *Pater Noster* da genta,
Ha goude : *Ave Maria*.

*Pater...
Ave...*

En ano an Tad
Hag ar Mab
Hag ar Spered-Santel.

Evelse-bezet-graet.

MOULADURIOU ARVOR
— 13, plas an Amann, —
— GWENGAMP —